


DEUT, VA DOUE

Rozec - Grignon de Monfort



Diskan : Deut va Doue, deut da ren em c'halon,
Deut d'am maga dre ar gomunion.

1. Va ene paour a zo ouz ho kortoz, va Zalver,
Evel eun douar yen, skarnilet gand gwall-amzer.
2. Mar deo gwir ho komzou, c'hwi a vezo d'am ene,
Glao dous an abardaez pe glizennig ar beure.
3. C'hwi eo ar pastor mad, me an dañvad dianket :
Edon 'kreiz ar bleizi hag hoc'h-eus va diboaniet.
4. Rak-se 'ta, va Jezuz, me 'zeu da glask ho panked,
'Vel ma red ar c'haro d'ar feunteun en e zehed.

VEenez, MON DIEU

*D: Venez, mon Dieu, régner en mon cœur,
Venez me nourrir de la communion.*

1. *Ma pauvre âme Vous attend, mon Sauveur,
Comme une terre froide et desséchée.*
2. *Si vos paroles sont vraies, Vous serez, pour mon âme,
La douce pluie du soir, la rosée légère du matin.*
3. *Vous êtes le bon Pasteur, je suis la brebis perdue ;
J'étais parmi les loups; Vous m'avez tiré de peine.*
4. *Aussi, mon Jésus, je me présente à votre banquet,
Comme le cerf assoiffé vers la fontaine d'eau vive.*